

# Maro ar c'hi rouz

## E Presbital Plougwin 374

### Var Dôn eur Werz koz

1

Selaouit braz ha bian, tud koz ha bugale  
Potred a Lanrivogare, merc'hed Gwitalmeze  
Lambôliz, Santiz-Pabu, pagahiz Landeda,  
Eur c'helou trist a lakfe eur garrek da ouela.

2

Persoun Plougwin en doa, dre vadelez Doue,  
Eur c'hi euz ar re gaerra da ziouall e leve,  
Allaz, allaz, an Ankou zo kwezet var ar vro  
« Tout-Pipi » ar c'hi terrubl, « Tout-Pipi » zo maro.

3

Kavet vardro Lockmajan, puchet en eur c'horn-tro,  
Ha gwerzet d'ar presbital vit eur banne « tako »,  
Tout-Pipi n'eo ket eaz anaout he ourin,  
Ar pez zo sur, he gerent n'emaïnt ket e Plougwin.

4

Diouz ma kount eur miliner e zeo, deut euz a hell,  
Euz a gichen Tombouktou pe deuz a Blouarzel,  
Ma neo ket euz a Gastel, pe deuz a Enez-Vaz,  
Var-eün a-hed al lignez divar gi Tobiaz

5

Kement o deuz hen gwelet e kreiz e yaouankiz  
A zo red dezho anzaos e zoa eur c'hi dreist-priz,  
Gant he zae flour marellet, dem-rouz ha dem-velen  
Roschild en dije prenet kant mil lur he groc'hen !

6

Rampet evel eun trebest, he gov tost d'an douar,  
Biskwaz eur barrad evel he c'hellaz hen-diskar,  
He tri tougn du-mogeded, he froñiou braz-digor  
O dije great, avi da botred an Arvor !

« Rap, rap, » leiz e gornanen, « rap, rap, »  
C'hoant en doa kara gwelloc'h eget kloc'h Treglonou.

8

Ne oa ken da lavaret nemet, e pevar ger,  
Ne jouche ket awalac'h a-zindan he dailler,  
Ha c'hwaz ma ve bet gwisket dezhan eun tam bragez  
Ne voa ket 'propoc'h aotrou var zouar ar barrez.

9

Pa gweze er presbital an derchen, ar c'hlenved  
N'oa ket gwelloc'h medesin eget ar c'hi raouled,  
Da gonsoli ar c'hlanvour en he bourmenaden  
Tout-Pipi d'ar pildrotik a gerze 'n he gichen.

10

Siouaz, ar givizerien, re vag en ho staliou  
O doa taolet varnezhan málloz Fanch an Ankou,  
Ha dizale oue gwelet he groc'hen o freuza  
He gov serret d'ar bouet, hag he lost o kweza.

11

He zaoulagad koc'hennet, he benn trist a pounner,  
Kaer e oa pokat dezhan, ha dourna kant Pater,  
Eun dervez e oue ranket e gas da « Bont-an-Traon »  
Eno e zeo bet krouget. Kleier sonit : kaony, kaony !

12

C'hoarzit brema dizourzi, targisien ar barrez  
Ne vezoc'h mui dilojet euz a douez an dréz  
Ha c'hui, laeroun avalou, ha laeroun ar pechez  
Ne vezo mui diskolpet loeren ho pragez

13

Biken n'hellin lavaret pegen braz rangalon  
O peuz bet da ziwaska, paour-keaz Aotrou Person,  
Koll eur c'hi euz ar seurt-ze a zo koll eur fortun  
Gwelloc'h e ve deoc'h beza torret ho korn butun !

14

Ha c'hui, tud ar presbital, Mari ha Mari-Jean  
C'hui o pije evithan taolet ho tourn en tann ;  
Kemmeskit oll ho taelou ha kanit ganen-me :  
Kenavo d'an Tout-Piti : « Requiescat in Pace » !

*(Great gant PAOTR TRÉOURE, da c'hi rouz, he vedezin).*